



## Deus ganin

Skrivet gant ?

Deus ganin'ta yann-vari  
War al leton, war al leton  
Deus ganin'ta yann-vari  
Ni'c'hoario patati

### **Diskañ**

**Sav da benn, hastafo  
Pase poent, pase poent  
Sav da benn, hastafo  
Pase poent dont en dro !**

Deus ganin'ta war an hent  
Da c'haloupat, Da c'haloupat,  
Ni c'hoario troadig kamm

Deus ganin'ta Soazig Foll  
War al leurenn, war al leurenn  
Ha ni a zañso gant an holl

Deus ganin'ta bord an aod  
Da besketa, da besketa  
Ha ni'bako pesked brav

Deus ganin'ta betek kêr  
Da c'hlabousat, da c'hlabousat  
Ha ni gavo kouignoù mat

Deus ganin'ta dre ar bed  
Da c'hwitellat, da c'hwitellat  
Ha ni glevo an dud vras

Deus ganin'ta an oabl glas  
Dreist ar c'houmoul, dreist ar c'houmoul  
Ha ni gano d'ar stered